

(f. 168 v°)

Coanta plac'hik zo en Treguer
 eo Hiedik ar barazer.

Pa gerin me me iel de zi
 Ne garan nikun keit ag hi

Ar mest bernard a lavare
 De fostillon eur deis a voë :

Va fostillon va fot a di
 Ge gant liser petek heni

Ke gant liser petek va far
 Goez diouti petra lavar.

— Bonjour iliedic ar barazer
 A deoc'h fostillon na doc'h en ker.

— eur zivezadic oc'h deuet
 Dirzjou genta man va euret

bis
 lavarit dezan dont d'am goelet

Chenhamant zo ebar el liser
 Drebi o bouet a mond d'ar ger.

— Ma fostillon din leveret
 Petere respont a heus bed

Chenhamant zo ebar al liser
 Drebi va bouet a dont d'ar ger.

Il n'y a pas de titre dans le ms. — M. Pierre Le Roux a publié cette pièce sous le titre: Hiedik ar Barazer. (Annales de Bretagne, novembre 1898, p. 60-64).

168

Diziou genta man e euret
Lararet deus deoc'h mond d he goëlet .

— Va fostillon va fod a ti
ten din va marc'h a merchossi

(f° 169 verso)

ten din va marc'h a dib én din
Ma zin d he voëlet pa lavar din .

— Dibonjour liedic ar barazer
A deoc'h mest bernard pa moc'h er ger .

Re zivezadic a zeoc'h deuet
Diziou genta man va euret .

Chwi o poa dime prometet
Pa deuchen er vro va chemeret .

Ma prometis deoc'h ag a ris
passeal diouzo'h a c'hoantis

passeal diouzo'h a moa gred
Ober goap a innocentet

Mer goar arad iliedic
Oc'h a lignez nobl a pinvidic

Vid beza ho preuz dichentil
A deuz he gosterz kleze dir

bis

O c'heur skoët e deus me meus mil

Ag a ven me mab da eur belek
A trugare Doue n'ey daon ket

Guinidic on deus er c'hanton
A lignez nobl tud a fesson .

(f° 170 verso)

Me a meus eur maner er Vourdel
Ag a zo varman trivarc'h tourel

Na neus prenest var dro dam zi
Na meus moien do allaouri

Ag o harre tout e fons ar mor,
A chomet gant va mam e honor.

Me a meus trivarc'h halid rus scarled
A kement al a rus pourpret

Ag o roffe tout kuit eb eur pes
D'an ini am graë iris intanvez

Liedic na lavarit ked mad
Iledic mirit o tillad

Me a rei do tous eul louzaouen
A lakei e ouzriet da asten

en nan doue, mest bernard na roit ket
Din ve ar vez deoc'h ar pec'het
his
lac'ha eur den iaouank noz e heuret.

—
)

Latou Boudier, 22 8^{bre} 1852.

La chanson est sans doute inachevée,
dit M. P. Le Roux, à la fin de
sa publication.

[rievy orig. 168, 169, 170 rectos.]